

CHANSON NEVEZ

VAR SUJET

EUR BROMEZE FERVANT HAG EUR SEPARASION

ETRE DAOU DEN YAOUANK

var ton ar *Feuz Promeze*

Prosternet e ma c'halon
N'ho presans, Bretonet,
Vit goulen o c'hattansion
Eur momet en sekret :
Me disclerio en guirion
Eur promeze fervant
Hag eur separasion,
Entre daou den iaouank,

Na fell ket din er poent man,
Dont d'abuzio paper ;
Sujet avoalc'h a gavan
Hep asten ar matier
Eur re-bennag marteze
A gemero an er
Da meprisan ma bue
Dre ma c'hespliki skler.

N'ont ket dign a droug-zello
Pa n'am anaveet ket,
Rac zavantoc'h evidon
A zo bet n'em leuyet.
Ebars en lazo Venus
Hac e mab Cupidon
Pere a rent maleureuz.
Sivoas l meur a galon.

Me zo eun den iaouank
Hac a meus consentet
Karout eur plac'h iaouank
Dign da vean karet ;
Vit dirag ma daoulagad
Na meuz remerquet hini
Da gad eun er ken agréabl
Herve ma fantasi.

Vel gant Doue inspiret,
Da ouel en Assomption,
Me a zo bet azeet
N'he c'hichen 'n eur pardon.
En parouz Pleudaniel,
Kichen eur goz ilis
Eur plas devot a zantel
Goude fin an ofiz.

Eno Var douar ar Verc'hez,
Me meus bet remerket
He skiant hac e furnez
Ha memez e genet.
Me meuz groet reflexion
Ha n'em sonjet erfat
Na momp biken separasion
Vit mar be ze d'he grat,

Aboster ma'iaouankis
A neus ma erretel.
Bet a voan vit n'em diviz
Ha pa m'eus ket kredet
Parlant dei e nep fesson
Demeuz ar garante
A zanten bars em c'halon
N'he c'hever en deze

Nao miz em bet en guirion
Hep en em rancontri
Delc'het ho c'hattansion
Iaouankis, me o suppli
Aman e teu Cupidon
Gant eun ardeur neve
Da alumni, 'nem c'halon
Elemancho a garante.

Annonz a riz d'ar plac'h-se,
O vont d'eun assemble
Ponoz am boa bolante.
Da gat e c'hamitie ;
Hac evit n'em assuri
Deuz he fidelite
A meus goulet diganti
Ober din promesse.

AR PLAC'H.

« Ma mignon nimp so iaouank
D'ober promesseou :
Gant ann disteran tourmant
A chanc'h hon ideou :
Ma torfemp hou promesse
Hac ober eur parjur
Me fell din en em bue
Kavet eur guir assur.

AR POTR.

« Birviken an amzer fall
Na allo distrujan
Ar garante leal
Pehini a dougan ;
Mes me zo en distians
Demeus ho carante :
Roet din ann assurans
Vit ar rest hon bue. »

AR PLAC'H.

« Arsa eta, ma mignon,
pa omp en plas hirie
Na vo quet dre draison
A rin d'ec'h promesse

Kemer a refomp vit test
Eun avocat a Dreguer,
Rac, on c'halon so c'hoas fresk
Da chom nep culatenr. »

He dorn en hem hini.
Prosternet d'an daoulin
Dirag Sant Ervoan Elouri,
Mab-henan Kervarzin,
En iliz ar Minibi,
An naontek a vismae
A prometjomp dimezi
Hon daou ann eil d'eguille.

Secret ve ar promesse
Dirag eur pobl a leiz :
Pere dired an de-ze
A bep coste a Vreiz
Da velet penn ho avocat
Dre guir devotion
A douger var eur brancar
Bars er procession.

O solennite joaüs
Evit eur bopl a fe ;
Biskoas de ken evuruz
N'em boa cat em bue,
Zantout a ran ma c'halon
Val heuet mesk ar joa :
Mes ret e cat separasion
Rac an noz a dosta.

AR POTR.

« Arsa, plac'h iaouank fidel,
Poent eo dispartian.
An heol zo arri izel :
Leket din breman
Eun termen d'a n'em gavet
Herve ho polante,
Rac pel a omp separet
An eil deuz eguille. »

AR PLAC'H.

« De eisvet ar Zocrament
Bars en kær Landreguer,
Zo eun assamble charmant
Gant ar bobl ar c'hartier
Mar be ze d'ho polante,
Hon daou n'imp ario
En Landreguer, en de se
Goude ar gouspero. »

AR POTR.

• Varkement-ze, merc'h iaouank
 Me souet d'ec'h bonsoar,
 Gant kals a agreamant
 Me a dalc'ho memoar.
 D'an termen a c'heus ficset,
 Kredet me'n em gavo;
 Na vefomp biken separate,
 Vit ar rest, on deyo. »

Pa aris bars er guer,
 A meus bet ispliket
 D'enn tad a deur vamm tener
 Ar promesse moa gret.
 O daou a skuljont daero
 O c'haneveout ma chang,
 Mes n'os eo pell a zo
 Reposomp en silañ.

Kerkent e vauz kousket,
 Vel' n'eur ravissamant,
 Hac e meus bet remerket
 Eur groas ker a arc'hant
 Ha varni eur gurunen
 Ornet gant greun perles,
 Poset en kreis eur bleuen
 En kichen ma mestres.

Dre spont on bet difunet
 Mes goelet meus bet erfat
 Ma mestres bars'n eu'n archiet
 Dirac ma daoulagad;
 Bet on pell vemorin
 Var sujet kement-se
 Mes rabet eo'n droublin
 Vit actou eun unvre.

Tostat a ra d'an termen
 Pini m'am passinet;
 Mes goelet a ran eu, den
 O tonet d'am c'havet;
 Roet neus din eul lizer
 A zb bordet en du
 Petra zo var ar paper.
 Ret eo goelet dustu.

Al lizer

• Salut deoc'h ma guir vignon
 « C'hoas eur vech, dre speret;
 • N'in quet d'an assination
 • A moa dec'h promettet,
 • Skoet on gant eur c'hlevet,
 • Me gret vit ar maro,
 • N'omp ket gan Doue choaset
 • Vit bean prijjo.

• Ma be a deui da gleuzan
 • Var ben neubeut amzer.
 • Vit ar vech divezan
 • Adieu ma servijer,
 • Gras dimp da gaout chons,
 • D'an n'em velet er gloar
 • Evit hon recompans. »

Ar Potr, out-han he unan

• O bleuen ker florisant
 Ma koveez d'an douar,
 Tout ma oll agreamant
 A chancho en glac'har;
 Oll esperans ma deio
 Plijadur ma bue
 Assembles' guenit a goeo
 Da repos bars a ve

Rabet eo disconsoli
 Vit guelet al lizer,
 An termen a so arri,
 Varc'hoas en Landreguer,
 Me a glevo a beurs mad
 Ha guir eo kement man;
 Ar paper a lest lakat
 Sort a guerer varnan. »

Arri bars e Landreguer,
 D'an termen assinet
 Vel ma sonna peder heur,
 Me meuz bet intantet
 Eur plac'hik iaouank tremen.
 Laret d'he c'hamaradez:
 « Sell aze eme'z eun den
 Zo maro he vestrez. »

Poignardet eo ma c'halon
 Ken a frim ma goad
 Vit klevet et dec'laration
 En em c'hanavis d'he c'had;
 • Respont din merc'h iaouank,
 Mar be ho madelez,
 Me a c'houl humblamant
 Penos a ra ma mestrez. »

AR PLAC'H IAOUANK

• Na servij ket den iaouank
 Rei d'ech anoud gues:
 C'houi a zo bet eun tirant
 En andret ho mestrez:
 Hi divoar goelet ar maro
 A lekas he foan
 Da skrivan dec'h ar chelo
 Mes c'heus ket groet a van.

Me a moa e c'liasistet
 Da skrivan al lizer
 Goude ma franchisset
 Ha roet d'ar facteur.
 Hi finissa he bue
 D'ar goener d'abarde
 Ha herie deus ar beure
 E diskennet 'n he be »

AR POTR.

• Ma moa kals a esperans
 A voa fauz al lizer,
 Pe groet gant tud a Mezans
 Vit tremen ho amzer.
 Mes ho komzo ken pikant
 A boes var ma speret
 Me a lar dec'h merc'h iaouank
 Kenavo 'r c'henta goelet. »

Kouitat a riz an assamble,
 Occupet ma speret;
 Rak me en em vel hirie
 Maleureus var ar bed
 Ma mestrez a zo maro
 Ma me a chom breman
 Da dipitan ma deio
 Var he ler'ch er bed-man,

N'avean ket ar matier
 A galmfe ma glac'har;
 Me na mo ken mes malheur
 Biken var an douar.
 Pa velan peguen iaouank
 A c'he deup ar maro
 D'am plomji bars en tourmant
 Deus a greis ma joaio.

Servij ket din chom aman
 Da isplikan kanvo
 Rac na allan ket kanan
 Ha goelan var eun dro
 Supplian a ran Doue
 Maro var ar C'hialyar
 Ma recevo he c'hine.
 Ha uimp holl en he gloar.

Groet gant Pierre RESON,
 Goude bean recevetan de klaration
 Digant eun den iaouank desolet
 Gant glac'har de vuaz karef.

(Propriété de l'éditeur).



Lanhuon, intanvez Ar Goffic, leorer